



# SON AR GARANTE BARFET.

1046 A. 6/

Var ton : *Ton humeur est, Catherine.*

*An Den Yaouanq.*

L AQET eo en hor c'halonou  
 Unan demeus hon ezomou  
 Eo ar Garante Barfet ;  
 Destinet eo da bep-unan,  
 Gant un urz leun a furnez ,  
 E stat hac e chang er bed-màn :  
 Darn so contant , darn dies.

O compren gant attantion  
 Qementse , hac o selaou  
 An ecleo demeus ar c'hanton ,  
 E respont ouz ar moeziou ,  
 Me meus remerqet o tremen ,  
 Gant 'un êr guyé ha contant ,  
 Dre va c'hichen , ur femelen ,  
 P'ini a ra va zourmant.

Pa meus-hi guelet o tostat ,  
 Oun commancet da grena ;  
 Bervi a rê ennòn va goad  
 Gant an aouen hac ar joa ;  
 Qer troublet e voa va spret ,  
 Qen em boa poan o parlant ;  
 Gouscoude em eus disclèryet  
 Evellen va zantimant.

Bonjour d'êc'h , femelen charmant ,  
 Ha dign da veza caret ;  
 Ma ouffec'h e pe santimant

Emoun-me en hoc'h andret ;  
 Ma halfec'h guelet an tourmant  
 Ho c'heus laqet em speret ,  
 E teufec'h gant ampressamant  
 Da zoulaji va c'hlévet ,

Aba ma meus hoc'h anavet ,  
 E concevis evidoc'h  
 Un amitié hac ur respet  
 N'oufe qet beza brassoc'h.  
 Ret e ve deoc'h beza ingrat ,  
 Ma na zeut eus ho costez  
 Da gavout anaoudeguez vat  
 A guement a garantez.

*Ar Plac'h.*

Tavit gant ho complimanchou  
 Hac ho fidelite vras ,  
 C'houi a zuppos santimanchou  
 Ha n'hoc'h eus santet biscoas ;  
 Rac m'ho pije, a gueit amzer ,  
 Evidoun-me concevet  
 Un inclination sincer ,  
 C'houi ho pije'n din merqet.

*An Den Yaouanq.*

Merqet e meus dêc'h ho caren  
 Dre va fêçon da ober ;  
 Honnes eo ar guella moyen  
 Da dremen evit sincer :  
 Mes cresqi a rit va zourmant ,  
 Dre un discour qer cruel ;  
 Elec'h rêy din soulajamant ,  
 E teuit d'ober din mervel.

*Ar Plac'h.*

Den yaouanq , c'houi c'heus prepart

Evel ma fot ho qentel ;  
 Mes n'en doc'h qet qen rezolvet  
 D'en em lezel da vervel.  
 C'houi a fot dêc'h va abusi  
 Dre ho comzou studiet ;  
 Ma ven sot aoiualc'h d'ho credi ,  
 C'houi c'hoarsfe var va sujet.

*An Den Yaouanq.*

Plac'h yaouanq, mar qarit sonjal  
 E meur boent eus va bue ,  
 E velfec'h, elec'h godissal ,  
 E laràn ar virione ,  
 Rac e pep seurt occasion  
 E meus roet dêc'h da gompren ,  
 Dre an hirvoud eus va c'halon ,  
 Peguenient en ho carrien.

*Ar Plac'h.*

Ne meus ho quelet oc'h ober  
 Nemet evel meur hini ;  
 Dibot eo ar voaset sincer  
 A eller da rancontri.  
 Cessit ta d'am importuni ,  
 Tavit gant hoc'h amitie ,  
 Ha ne zeut mui d'en em vanti  
 Gant ho fos fidelite.

*An Den Yaouanq.*

O pebes un distridiguez !  
 O glac'har cri ha c'hoëro !  
 N'oun qet caret gant va mestres ;  
 Guell ve din beza maro.  
 An eol, dirac va daoulagad ,  
 Ne ro mui a sclêrijen ,  
 Ha nemet em bez ne ven mat

È creis an devalijen !

*Ar Plac'h.*

Truez e meus ous ho quelet  
 En ur glac'har qer grevus ;  
 Ho calon a so contristet,  
 Pe ez oc'h un den tromplus :  
 Mes ma ouifen e vec'h sincer,  
 Den yaouanq, m'ho qemerfe  
 Eus a vremâ da zervicher ;  
 Marteze me ho carfe.

*An den Yaouanq,*

C'houi, va mestrez, c'houi a blij din  
 Dreist qement zo er bed-màn,  
 Na biqen nicun na garin  
 Nemedoc'h-hu hoc'h-unan :  
 Quittet, quittet an douetanq  
 Hoc'h eus var va c'harante :  
 Me en tou dêc'h, en assurancq,  
 Biqen nemedoc'h n'am be.

*Ar Plac'h.*

Sant Pêr en doa d'e Vestr touet  
 Enep e adversourien,  
 Penos ne vije qet manqet  
 D'e zicour ha d'en difen ;  
 Allas ! ancouat a raz e le  
 Qent m'en doa ar c'hoc canet :  
 Ar Zant en devoa gouscoue  
 Teir guech e zianzavet.

*Ar Den Yaouanq.*

Sant Pêr en doa dianzavet  
 E Vestr mad dirac an oll ;  
 C'houi ganén a zo qen caret,  
 Qen a rafen ar c'hontrol.

Dirac an oll dut assambles ;  
 Me so prest da zisclêrya  
 Penos eo c'houi sur va Mestres ;  
 Va flijadur ha va joa.

*Ar Plac'h.*

Diganêc'h ne c'houlennàn qet  
 E teufec'h da bublia  
 Ar pez biscoas n'oc'h eus sonjet  
 Marteze bete vremâ.  
 Guell e ve ganén e teufec'h  
 Dre ur sacrific benac,  
 Da brouvi din sclêr em c'harec'h  
 Gant un intantion vad.

*Au Den Yaouanq.*

Goulet diganén , va Mestres ,  
 Ar sacrific a gueret ;  
 Goulet mar qerit va buez ,  
 Ne viot qet refuset ;  
 Nemet ma ellin , qent mervel ,  
 Obten , e creis va zourmant ,  
 Eus ho compassion ur zell ,  
 Ractal e varvin contant

*Ar Plac'h.*

Den yaouanq , me ameus clêvet  
 E voac'h un d'en variant ,  
 Oc'h eus , goude bout commancet ,  
 Torret meur ; angajamant.  
 Birvigen , hac en lavaràn ,  
 Ne recevin ur galon  
 E obteni ma ne allàn  
 Dre ur guenta donêson.

*An Den Yaouanq.*

Pa form Douc ur femelen ,

E crou prest ur par dezi;  
 Mes pell e vent, mar en ordren,  
 O daou en em rancontri;  
 Rac se eta, angajant,  
 Promessa hac amitie,  
 Grêt ouz re-all, a so neant  
 D'an eil evel d'eguile.

*Ar Plac'h.*

Bremâ me vel patant ha sclêr  
 N'oc'h eus qen intantion  
 Nemet da dremen hoc'h amzer  
 Ouz va henti, va mignon.  
 Abret eta va dilezet,  
 Ha retornit adare  
 D'an hini hoc'h eus prometet  
 Da guenta ho carante.

*An Den Yaouanq.*

Va Mestrez, credi a ellet,  
 Ouz oc'h anavout gentoc'h,  
 Va speret na bermetje qet  
 Carout nicun nemedoc'h:  
 Ha mar be ret din separi  
 Diouzoc'h, va c'harante,  
 Ampoezonet gant an annui,  
 Ne vo qet hir va bue.

*Ar Plac'h.*

Avoalc'h, avoalc'h, va zervicher,  
 Re emeus ho tourmantet,  
 Rac brein me anave sclêr  
 Peguement em cherisset.  
 Mar emeus grêt dec'h anduri  
 Un trêtamant qer cruel,  
 E voa eyit oc'h aprouvi

Ha gout ha c'houi voa fidel.

*An Den Yaouanq.*

O distro leun a garantez  
Hac a vir gompasion,  
Ha possabl e ve, va Mestrez,  
E ve touchet ho calon!  
Beza meus-me an esperanq  
Da velet fin d'am poaniou,  
Ha da receo ar recompanq  
Demeus va oll hirvoudiou?

*Ar Plac'h.*

Va Mignon, sec'hit ho taelou,  
Va Zervicher, me ho ped,  
Hac en em cherissomp hon daou  
Gant ur garante barfet.  
Eus va ferz hoc'h eus anduret  
An diveza affliction;  
Esperout a ran e teufet  
Da accordi din pardon.

*An Den Yaouanq.*

Evel ma ro ar glis neve  
Ar vue d'ar yeot sec'het,  
Ho comzou a zeu evelse  
Da zoulaji va speret;  
Dre un avis qer gracios,  
M'e meus esper da veva,  
Nonpas heppen un den eürus,  
Mes un den an eürussa.

Ho torn em heni, va Mestrez,  
Ha touomp dirac an Ee,  
Penos e vimp, hed hor bucz,  
Fidel an eil d'eguile.  
Ne zonzomp mui en hor glac'har



N'em garomp ha ni gavo  
 Ur barados var an douar,  
 Dre hor plijadurezou.

Var an douar n'ez eus netra  
 Qen douç hac an esperanç;  
 Alies e ra mui a joa  
 Eguet ar guir jouissanç:  
 Ur presant eo digant Doue  
 Da zoulaji an natur,  
 Hac e ve hon tromp a rafe  
 C'hoas e ra deomp plijadur.

Roue an Ee hac an douar,  
 Me anvez ho madelez,  
 Hac a rent dêc'h honor ha gloar,  
 Ha graçou a drugarez.  
 Dêc'h-u hoc'h-unan eo dlect  
 Da guenta va c'harantez,  
 Goude-ze, mar er permetet,  
 He c'honservin d'am Mestrez.

C'houi, va Doue, oc'h eus formet,  
 Dre un urz leun a furnez,  
 Eva da Adam da bried,  
 Hac o laçet assambles;  
 Plijet ganeoc'h, Oll-Buissant,  
 E ve din me destinet  
 Ar femelen-màn qer charmant,  
 Hoc'h eus grêt din da garet!

FIN.

---

E Montroulez, e ti LEDAN, e ru ar Pave.